

50



DISPUT

ENTRE

E U R C' H E R E

HAC

E U R B O T O E R C O A T

Var eun tōn neve.

Mar gallan gout ar feçon, e teuin da rima,
 Eun disput a neve flam, d'en em divertissa,
 Savet entre ar C'here hac ar Botoër coat :
 Pa vent crog en eur boutail int daou pot dilicat,

O daou o deus prometet e mijе digante,
 Gouide formi eun disput excellant entrese :
 Eun douceñ vio fritet hac eun tam bara guen,
 Hac eur bane da eva er fin ar ganaouen.

75

2 — —

Mar be glebiet an anchen ar bombard a zonô,
 A silaou gant parfete eun darn a resonô,
 Vit ho lacât da zisput an eïl oc'h e guîle
 Ha non pas rima netra nemet ar virione.

Er goan ec'h intentan, eme ar Botoër coat,
 E me a zeu dâ viskan treïd an dud dilicat,
 Ha te Kereer infam gant da vouteïer ler,
 A zigaç ar c'hlenvejo hac eun nombr a vizer.

Eun tam eo istimet huelloc'h ma etat
 Evit n'en deo da hini, pot ar bouteïer coat :
 Ma rankje beajerien bale gant sorguello
 E vent eun anter hirroc'h oc'h ober campagno.

Evit prepari 'n douar da lacat an trevat
 Eo eun dra necesser cavet eur boto coat ;
 Ne veler dêñ o palat er park gant ho boto ler
 Ha c'hoas e fell dit laret ne n'on ket necesser.

Goud a ran eo ar boto coat a gonserv ar yec'het
 Hac a brepar an douar evit lacad an ed,
 Evel ma c'her da redec er par gant-o 'veicho
 E scanvoc'h eur boto ler evit eur sorguello.

Pa deui an erc'h, ar scorn, hac ar goan kalet,
 E ranko ar C'hereour pac a vinaouet,
 Ha me doucho an arc'hant partout er marc'hajo
 Ha te zello ouzin, ha digor da c'henno.

— 3 —

Pa erruo mis meurs, hac an neve amzer,
 Da viska 'n habijo brao hac ar botoeïer ler.
 Neuze na vo estimet netra eur boto coat,
 Eur boto ler da vale a zo trao dilicat.

Alies e rankes mont da dy ar c'hivijer,
 C'hoas ma ne pe nemet tri skoët pe eun tri skoët anter,
 Ha me laca assambles betec c'huec'h uguent skoët
 Da brena ar c'hoat boto evit ar laysantet.

Goël a ze dit , ma mignon, pa deus eur bern arc'hant
 An neb o deus neubeutoc'h a vev honestamant.
 Me a deb kig ha souben ha ma yod da greiz-de :
 Ordinal ec'h intentan on bevet kouls a te.

Poent eo din finissa rag an nos a dosta,
 Hac an hostis a jeno pa na evomp netra,
 Haca roïn din hon c'honje, Coader ha Kerer
 Da bartial eus he dy ha mon da gaet ar guer.

Ebars en hostaleri 've aliez rezonio,
 Disput entre 'r vignonet ha chass-bleo avechou ;
 Ar c'hoste cre a c'hone ebars en peb affer,
 Mar keres ni a velo, eme ar C'hereer.

Goude leïs cov e cargjont 'vel daou ghy animet
 Ha stagan d'en em gannan evel tud malisset,
 Ken ma rankas an hostis kemer e vas ribot,
 Ha skeï var zin diskregui en feçon ma oant krog.

— 4 —

Goulenomp eur chopinat d'en em dispartia :
An hostis hon servicho mar deuomp d'e b̄a,
Hac evomp peb a vanac'h er fin ar gānaouen ;
An oll a rank caout boto pe vale diarc'hen.

An hini en eüs rimet an disput dilicat
Savet etre eur C'here hac eur Botoër coat,
En enz gret meur a hini, e hano Yan ar GUEN,
Hac a veler ordinal en fia ar ganaouen.

